

(f. 203)

An tour plom autre version v. 156

Kenta vellas an tan en tour plom
eur veugel vien divar brec'h e vam

hag e lavaras da Plouberis
e man krog an tan en ho c'hillis

Sirvas er chreüs e man ive

Kris a viche ar galon na voelche
en goerret plouber an eb a vije

e vellet tri person a tregont
ebars er verret oc'h e neum respo

Da gout na pini vije an ardissa
Da pignat var an tour da genta.

Person plouber a lavare
ebars en tour dre ma pigne :

me non ket evid mond aman
gant ar plom bewet o diveran

Dre ma koue leski e ra

e man an erouant var beg an tour
hag en henon evel eur skour.

(f. 204)

Petra Klaskerz var dro va zi
Me non ket bet en ta himi :

ta illis a zo interdisset
gant eur plac'h iaouank hag eur kloarek
o pec'hi heni noz nedellek.

138

Kenta lazpas an tan en tour plom
 voa bara segal a lez bron.

lez a peultrin eur vreg trivarc'h bla
 e voga e bugel kenta.

Kris vije ar galon na voelche
 en goeret Plomber neb a vije :
 E voelet ar sent hag ar sentezet
 Digasset tout da gorn ar verret.

O vellet a[ri] verc'hes vari
 Renket diloja deus e zi .

7

Jannet Kerquiduff 16 Janv : - 51.